

Ar " Bleun Brug"

D'an 13 ha d'ar 14 a viz gouere, kear Lannilis a dregerno gant ar vombard hag ar biniou dre ma vo lidet en derveziou-ze goueliou Bleun Brug Leon.

Pep hini ac'hanoc'h en deus klevet eun tamm hano bennak diwarbenn an doare ma vo renket an traou. Met pep hini ivez a garfe anaout gwelloc'h an abadennou a vezo e Lannilis en derveziou-ze.

Ar pennad-skrid man a zo savet evit seveni ar youl-se hag evit respont d'ar goulennoù niveruz a vez graet ouzin.

D'an drizek, da nav eur noz, e vezo en hon iliz parrez eun abadenn gan. Eur « concert spirituel » a reomp eus' an dra-ze e gallek. Bez hon devezo an eurvat da glevet strollad « Kanerien Bro-Leon » eus Landivisio. Anaout a rit brud ar strollad-se. Warlene ez int bet e Paris ha deuet eo ar maout ganto. Ne ket bemdez o pezo tro da glevet eur strollad kanerien ha kanerezed hag o deus bet ar priz kenta evit ar Frans a-bez. N'hon deus ket ezomm eta da boueza warnoc'h' evit dont niverussa ma c'helloc'h da zelaou ar c'hanaouennou dudius a vezo kanet. An abadenn gan a zo dindan renerez an Aotrou Paol Le Flemm anavezet mat-kenan gant kement hini hag a ra wardro ar c'han.

D'ar sul vintin, azalek eiz eur, e vezo e skol Sant Anton kenstrivadegoù pe gonkourioù. N'emaoc'h ket heb geuzout e tregern ker Lannilis gant kanaouennou brezonek eun neubeudik a zo. Klevet a reomp ar vugaligoù o kana son ar « Boutaouer koad ». Klevet a reomp ar merc'hed dek vloaz o kana « Ar c'hloc'h a zon 'uz d'ar barrez » epad ma kan ar baotred dek vloaz: « Netra ne blij d'in me 'vel eur banne kafe ! » Fiziens am eus e teuio ar maout gant unan bennak anezo. Met ret e vo poania, rak kali bugale a deuio da gonkouri da Lannilis eus Plougerne, eus Plouvian, eus, ar Folgoat... Ar re n'ouzont ket kana a c'helo displega istor « Sant Peran », pe istor « an tri gaz bihan ». Beac'h d'al labour paotred ha plac'hed Lannilis ! Da 11 eur, en hon iliz parrez, ken kaer en he diabarz ha dizale kaeroc'h c'hoaz en he dianvaez gant al labourioù emaoz oc'h ober endro d'ezi, e vezo kanet an oferenn bred. Evit ma c'hello muioc'h a dud mont ebarz e vezo tennet ar c'hadorioù er maez. An oferenn a vezo kanet gant an Atrou Favé, vikel vras eskopti Kemper. Ar zarmon a vezo graet gant an Aotrou Chaloni Falc'hun, kelenner e skol-veur Roazoun hag aluzenner ar BleunBrug. Ar c'hanaouennou a vezo roet gant strollad Plougerne, met kanerien Lannilis a roio ivez an dourn d'ezo.

Goude an oferenn ez eomp d'ar vered evit pedi evit ar re varo ha lakat eur bokad bleunioù war o bez. Son ar biniou a vo klevet hag ar ganerien a gano

« O Breiz, o bro garet, Douar hon Tadou Koz,

« O eskern sakr a gousk e yenijenn an noz,

« D'ar re a zo maro evit difenn ar vro,

« Atao feal ni a jomo ! »

Goude lein, da ziv eur, ez eomp da vaner ar Roual elec'h ma vo graet an abadenn : « Son, koroll ha kan ! » epad an abadennse e klevomp an holl strolladoù a vezo deuet da Lannilis: al lazoukana (chorales) ar c'hevrennoù, ar bagadoù. Eun ugent strollad bennak hon eus da glevet ha da welet: ouspenn 500 paotr ha plac'h yaouank gwisket ganto holl dilhad kaer hor Breiz.

Warlerc'h an dra-ze e vo displeget e 16 taolenn, graet pep hini gant ar parrezioù tro-war-dro, istor an Aberioù.. Ha goudeze prosesionoù an holl barrezioù (etre 25 ha 30 anezo) hag ar Strolladoù a dremeno dre ar podium evit kemeret hent ar bourk elec'h ma vo roet bennoz ar Zakramant araok en em guitat. Ha diouz an noz, da 9 eur, e sal ar patronaj e vezo roet eun abadenn peziou-c'hoari gant paotred ha plac'hed Lannilis ha gant kanerien Plougerne.

Setu eun diverradenn eus ar pezh a welot e Lannilis d'an 13 ha d'ar 14 a viz gouere.

M'ho peus c'hoant e ve kaer pep tra eo ret d'eoc'h en em lakat da labourat azalek breman. Hor rener, an Aotrou Pochat, hag e guzulerien ne espernont nag o foan nag o amzer evit ober eus gouelioù ar Bleun Brug kaera gouelioù a vezo bet morse e Lannilis. Roit an dourn d'ezo evit facha kaer o tiez hag evit ma vezo ar gouelioù-se eur mor a gan hag eur mor a zudi.

T. F